



Chapel Santez Madalen e Penmarc'h warni tres an diskar-amzer

PHOTO JOS LE DOARÉ

Bleun-Brug

Niv. 74 (Miziek-Mensuel)
Koumanant-Abonnement : 500 Fr.

HERE 1954

TAOLIT EVEZ MAT

Diwar an niverenn-mañ, evit kement a sell ouz ar c'houmanañchou, adkoumanañchou, chench adres e vo ret skriva ha kas an arc'hant da :

Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.

C. C. P. 1541.90 Nantes.

Eur bern a zo ha n'o deus ket paet o c'houmanant 1954 ha meur a hini o c'houmanant 1953.

Araok d'eoc'h kredi e c'hell « Bleun-Brug » beva gant aer an amzer. An em c'houlenit eta ha paet eo ganeoc'h ho koumant. Ma n'eo ket kasit raktal dre ar post, d'an adres a welit uheloc'h (hep lakaat ano all ebet nemet : **BLEUN-BRUG**) :

Koumanant ordinal	500 lur.
Koumanant a enor	600 lur.
Koumanant madoberour	1.000 lur.

AR SKRIDOU a zo da gas evel araok, da :

M. l'Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan (Finistère).

AR SKODENNOU IZILI ha kement a sell ouz ar skol dre lizer a zo da veza kaset da :

V. SEITÉ, Bleun-Brug, Châteaulin (Finistère). — **C.C.P. 544.22 Nantes.**
SKOAZELLER : 200 LUR — EZEL : 500 LUR — MADOBROUR : 1.000 LUR.

TAOLENN

Ar bedenn diouz an Noz, gant L. B.	1
Penaos e c'hell eun den dimezet beza kure (B. Dominik)	2
Gavrig wenn Tan-y-Grisiau, gant A. Koulouarn	4
Priz kenta ar prezegerez, gant M.-L. Fily	9
Va beaj Madagaskar, gant A. Guilhaud	10
An Dug Per II ha Franseza Amboez, gant Konhoiarn	12
Keleier	14

PRENIT

Digant Y. ar Go, notaire à Gouézec (Finistère) : **Pedennoù da lavaret dirak ar re varo.**

Digant Couvent des Capucins, Roseoff (Finistère) : **Buhez Jezuz-Krist, Buhez Sant Fransez, Bleuniou Sant Fransez, Sant Fransez Mignon ar vugale...**

Digant V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin : **Me a zesk brezoneg — Yez hon Tadou — Le Breton par l'image.**

Digant abbé Poisson, 22, rue St-Louis, Rennes : **Histoire de Bretagne : 360 pages.**
Prix : 750 francs. Eul levr eo a dlefe kaout pep Breizad.

Lennit ha skignit « Bleun-Brug » — Heuilhit hor skol dre lizer.

Evit gwellaat hor buhez :

AR BEDENN DIOUZ AN NOZ



Dre ar bedenn eo bet boulc'het an dervez labour, kerkent ha gou-lou deiz. Harpet gant gras Doue, pep hini en deus poaniet war an dachenn merket d'ezan. Met ar c'horf, koulz hag ar spered a rank dis-kuiza, n'int ket dir int. Goude beza en em roet a-zevri d'al labour, setu ma c'houlennt o repos :

« An neb a c'houez bemdez a c'hounit e repos
Evit an dud vat, Doue en deus graet an noz. »

Dre ar bedenn adarre e rank beza klozet an dervez labour, pa deu an noz da astenn he mantel war an douar.

Ar c'housked eo skeudenn heñvela ar maro. Araok en em deurel ennañ, araok en em zispartia an eil diouz egile, tud an ti o deus eun dra diweza da ober asambles : koueza d'an daoulin evit trugarekaat Doue eus ar grasou resevet, a-hed an deiz, hag evit goulenn e vennoz, a-hed an noz.

Ya, va Doue, evit an nerz ho peus roet d'eomp da labourat, evit ar gwalleuriou ho peus pellaet diouzomp, evit ar bara ho peus lakaet war hon taol, evit al levenez ho peus digaset d'hor c'halonou : **O Tad eus an neñv, Hoc'h ano bezet santelaet, ho rouantelez deuet d'eomp, ho polontez bezet graet...**

Evit ar pec'hejou ken niverus omp kouezet enno dre sempladurez, dre fallagriez : **O Tad eus an neñv, pardonit d'eomp hon ofañsou...**

Evit dañjeriou an noz, epad euriou an deñvalijenn, pa glasko an drouk-spered troial en-dro d'eomp : **O Tad eus an neñv, n'hol lexit ket da goueza e tentasion ebet, hon diwallit diouz an droug...**

O, piou a lavaro, evel m'eo dleet, pegen kaer eo gwelout daoulinet en-dro d'an oaled, tad, mamm ha bugale, o kemerout skouer diouz ti Nazareth gwechall, o komz ouz Doue, o lavaret « Hon Tad hag a zo en neñv »... ha « Me ho salud Mari »...

« El lec'h ma z'eus daou pe dri o pedi asambles, en va ano, me, eme Jezuz, a zo en o zouez :

« Gant Jezuz hag e Vamm zantel
Mat eo beva, dous eo mervel. »

War ar bedenn, graet asambles en ti, evel war an douar mat, e teu da vleunia an holl vertuziou kristen, a ra dudi buhez ar familh : ar garantez, an emgleo, ar peoc'h, an nerz kalon da c'houzañv ar boan... Ha beza c'hell beza eur gwalleur brasoc'h evit eun ti, evit eur familh eget dilezel ar bedenn e boutin diouz an noz ?

Dleourien omp da Zoue eus eleiz a draou bemdez. O lezel ar bedenn a-gostez, araok mont da repos, e nac'homp paea d'ezañ hon dle hag e kouezomp dounoc'h douna er baourentez...

« Eur en den o labourat
P'en deus feiz ha bolonte vat. »

L. B.

Penaos e c'hell eun den dimezet beza "kure" en e barrez

Eul lenner ha kenlabourer eus eskopti Soissons
a skriv d'eomp, e brezoneg ar pennad-mañ.

« N'ankounac'hait ket emaoe'h en eur vro a « vision », en deus lavaret an Aotrou 'n eskob d'e gloareged, ha d'e veleien. Na chomit mui a-sav, deuet eo an amzer da vont war-raok, gant nerz ha kalon. »

N'eus ket a veleien a-walc'h en eskopti ha setu perak ez oun deuet da veza « kure » hor person daoust ma z'oun dimezet.

Hon eskopti, espokti Soissons, a zo ken bras ha departamant an « Aisne ». Rannet eo e teir lodenn : Ar « Saint-Quentinoise », al « Laonnoise », hag ar Soissonnaise ».

Hon deaniez (doyenné), deaniez Vailly, en em gav er « Soissonnaise ». Missy, va farrez, a zo nao kilometr eus Soissons.

Pinvidik mor eo ar vro. Emaomp e-kreiz ar c'hounidigez douar bras. Bez' e kaver mereuriou a 2.000 devez arat.

Disheñvel-krenn eo ar vro-mañ diouz Breiz. Eur gompezenn eo. En hanter, e tu ar c'hreisteiz e kaver frankizennou bras a ed, heterabez, sukr hag avalou-douar. E tu hanter-noz ez eus pasturajou ha chatal.

Disheñvel-tre eo ivez, doare ar vro, e-keñver ar parrezioù. N'eus ket kalz a vourc'hiou, met keriadennoù niverus, enno 100, 200 pe 300 a dud, stank meur-bet, pep hini anezo disheñvel a-walc'h diouz ar barrez tosta.

Piou a gaver enno ? Tud a bep korn Bro-C'hall ha kalz estrañjourien. Tud divroet ha kenvroidi, deuet evit gounit arc'hant, forz ebet ganto eus a relijion, alies a-eneb. Emaomp amañ tost da Bariz, wardro 100 kilometr.

An dud n'int ket laouen, stag ma 'z int ouz madou an douar ; digredenn int met badezet siouaz ! ha divarrek d'en em staga ouz eun uhel-vennad na da veza entanet gant eun dra bennak, zoken ar yaouankiz.

Skoet kalet int bet gant ar brezel bras. Dismantret eo bet an holl barrezioù gant ar brezel-se, hag an dud o chom enno o deus bet ranket mont kuit evel repuidi. Tostik-tost emaoomp amañ ouz ar « Chemins des Dames » anavezet mat gant soudarded ar brezel 14-18. Setu 'ta ar re a oa bugale d'ar mare-se aet kuit pell diouz o bro, hep mont na d'ar skol na d'ar c'hatekiz na d'an iliz.

Ar re-mañ deuet da veza tadou a familh o deus savet o bugale hep relijion ebet, evel just, ha setu ni bremañ o stourm kalet ouz an dizurz-se.

N'eus en hon deaniez (doyenné) na skol gristen, na manati, na kouent ebet nemet eun nebeudig seurezed oc'h ober wardro ar re goz. N'eus na J.O.C. na J.E.C. Bez ez eus eur J.A.C. (Y.K.A.M.) dister ha dinerz.

8 den war 100 eus an dud a ya d'an oferenn, met 4 dre 100 hepken a wazed, en hon deaniez.

Hor person, eun den santel hag oberiant en deus pemp parrez, enno wardro 1200 den.

Met mont a ra war wellaat ar vuhez kristen er parrezioù-mañ ; nebeutoc'h a ziousiegezh war draou ar relijion, nebeutoc'h ivez a enebiez : Labour poanuz ha kalet hor person eo.

Evit ar pemp parrez hon eus bet :

E 1945 : 200 komunien.

E 1954 : 2700 komunien.

25 % eus an dud a ya bremañ d'an oferenn ha 6 % eus ar wazed.

Dibaot eo gwelout bremañ eun dimezi hag eun anteramant sivil.

Evel ma 'z eo aes da gompren, eul labour re bounner eo evit eun den hepken, setu perak e skoazellan va ferson ar muia ma c'hellan.

Al lodenn bouezusa eus va labour eo ober eun ofis bep sul.

Bep sul, da eiz eur diouz ar mintin, setu ni hon daou, an Aotrou Person ha me, o pignat e-barz « Rozali », eur c'hoz karr-dre-dan, da vont da barrezioù « Condé » ha « Celles », diou eus hor pemp parrez. Eur sulvez ez an da « Condé » hag an Aotrou Person da « Celles », hag er sulvez warlerc'h an Ao. Person a ya da « Condé » ha me da « Celles ». An Ao. Person a gan eun oferenn-bred ha me a ra eun ofis, evit rei d'an holl barrezioù an tu da santellaat deiz an Aotrou Doue.

Ne dan ket ouz an aoter evel-just ; ne doun nemet eur breur eus Trede Urz sant Fransez. Chom a ran dirak an daol-santell. Ne doun nemet blenier ar vodadeg.

Pedennou an ofis a zo heñvel a-walc'h ouz pedennou an oferenn, betek ar gorreou. Padout a ra an ofis tri c'hard eur.

Setu amañ dre vras doare an ofis a lavaromp :

Da genta, eur bedenn evit digeri : « Deuit Spered Santel, kargit kalon ho pugale, lakit enno tan ho karantez... »

Goude e kendalc'homp dre eur c'hantik d'ar Spered Santel, eur bedenn d'an Dreinded, ar C'honfiteor, ar C'hyrie, hag ar Gloria e galleg. Lenn a ran « Collect » ar sul, ar gentel, hag an Aviel. Amañ e ran e-pad dek munut eun displegadenn war ar Gentel pe an Aviel pe eun dra bennak all. Goude kantik ar Gredo e lavaran « sekret » an oferenn. An holl dud fidel a zo en iliz a ya neuze war o daoulin da adori ar Sakramant meulet ra vezo ha d'en em ouestla da Zoue evit silvidigez an holl. Lenn a ran roll ar re varo. Kana ' reomp eur c'hantik d'ar Werc'hez ha lavaret eun degad « Ave Maria ». Evit echui e lavaromp eur bedenn da drugarekaat Doue ha da c'houlenn digantañ e vennoz araok mont kuit : « Ra vezomp benniget ha miret gant an Aotrou Holl C'hal-loudeg ha trugarezus, Tad, Mab, ha Spered Santel. Evel-se bezet graet ».

Abaoe ma ran an ofis, 10 dre 100 muioe'h a dud a ya d'an oferenn hag ar re a deu d'an ofis ne daent ket d'an oferenn bep sul.

Petra ' vo lod an ofis en amzer da zont a-zivout adkristenedigez ar vro ? Doue hepken a oar. Eun dra vat eo evelato diskouez dirak an holl n'eo ket ar relijion tra ar veleien, ar vugale hag an dud koz hepken, met tra ar wazed.

Goude an oferenn hag an ofis e pignomp e-barz « Rozali » adarre hag e tistroomp d'ar barrez m'emaomp enni o chom, da gana an oferenn-bred.

Gwiska ' ran, ar wech-mañ, eur soudanenn wenn pe « obenn » evit beza « turiféraire » pe « cérémoniaire », ha diskouez adarre d'an holl eo ar relijion tra ar wazed.

Goude an oferenn-bred ez aio ar person da lida eun oferenn ziweza araok en em ziskuiza eun tammig.

E-pad ar goañv, goude koan, ni hon-daou, an Ao. Person ha me, a ya da welet hor parrezioù. Ret eo gweladenni ar re glañv ivez.

✱

Ha bremañ, d'am mignoned a lenno ar pennadig-mañ e c'houlennin eun dra a zeu eus kreiz va c'halon :

Ar veleien a dremen e-touez ar bobl evel estrañjourien, dre vras ; hep beza anavezet, komprenet, sikouret na skoazellet evel ma 'z eo hon dever hen ober. Setu ar groaz pounnera evito

Ar beleg a zo Doue en hon touez. Darempredomp 'ta ar beleg, karomp anezañ, difennomp anezañ, skoazellomp anezañ ar muia ma c'hellomp. Pounner-tre eo e garg, hag hepdomp ne c'hell ket dont a-benn da lakaat e barrez da zont da veza evel eun tour-tan a c'houlaoù ar vro gant ar garantez, e skeud Kroaz Hor Salver meulet ra vezo bepred.

Ar Breur Dominik,
eus Trede Urz Sant Fransez.

Gavrig wenn Tan-y-Grisiau

DANEVELL

d'an mignoned Gareth ha Glenys

Pedet gant va mignon Owen G. Lloyd, oun bet oc'h ober eun dro e Bro-Gembre, de laret eo Bro-Gaernarvon ha Bro-Veirion a zo kaer da welout. Eno e kaver menezioù uhela ar vro, en o zouez ar Snowdon, pe gentoc'h ar « Wyddfa », an hini uhela, a vez goloet a erc'h e-pad ar goañv penn-da-benn.

Glao a vez alies zoken e-doug an hañv ; degouezet eo bet d'in azeza e korn an oaled memez e miz Gouere, pa veze fall an amzer. Dre ma 'z eo ken didruez an temz amzer, e kar Kembreiz ar menezioù en em voda d'abardaez, e-pad ar goañv da gana asamblez. Setu perak moarvat eo ken brudet lazoukana Bro-Gembre.

Bep bloaz e vez dalc'het e pep kornad-bro eur c'henstrivadeg a ganiri, heñvel awalc'h ouz eur Bleun-Brug bihan, hag a vez anvet « Eisteddvod ». Neuze eo e vez dibabet ar ganerien gwella a yelo d'ar sizun genta a viz Eost da genstriva d'an Eisteddvod bras, dalc'het gwech en Hanter-noz, gwech e Kembre-Kreiz, gwech all er c'hreizteiz evel ma vez graet e Breiz evit ar Bleun-Brug bras a vez ivez, siouaz ! e deizioù kenta miz Eost, setu ma ne c'heller ket gwelout an Eisteddvod hag ar Bleun-Brug ar memes bloaz.

War venezioù uhel Bro-Gembre ez eus gevred gouez. Gevred doñv a zo ivez e meur a feurmd. N'am eus ket degaset ganin d'ar gêr eur c'havr Kerbreat, ablamour da Valtouterien Sant-Malo ; soñjet am eus neuze degas ganin eur gontadenn bet kontet d'in gant va mignon Owen. Miret am eus an anioù-tud hag an anioù-lec'h ; heñvelig-awalc'h eo ar re-mañ ouz anioù hor c'heriadennou ; ar re n'int ket ken aes da gompren evidomp a viro koulskoude blaz e zoare-douar d'an douevellig. Setu neuze eta kontadenn...

Gavrig wenn Tan-y-Grisiau

Dindan derez izella Moel-Wen, war grapenn ar menez, a-us da bradenn Cae-r-Ffrith emañ ar geriadenn vihan anvet Tan-Y-Grisiau. Amezeien vat eo an holl er geriadenn ; darn eus an tiegezioù endeeun a zo deñt da veza ouspenn mignoned : Brenda Evans an ti-krec'h a zo nevez-dimezet gant Siaki Thomas an ti-traon ; hag ar sùvez-all e vo gwelet Heulwen Jones o tont d'ar gêr eus ar chapel dorn ouz dorn gant mab henañ Rhisiart Morgan an ti-kornel.

Hervez Megan Griffiths goz, a oar ar c'heleier araok ar gazeten « Y Cymro » hec'h-unan, e vo dimezet an daou-se araok an Nedeleg.

N'eus ket pell koulskoude e vo tabut er geriadenn ha darn eus an amezeien war-nes en em facha. Hag abalamour d'eun disterik awalc'h a dra, e gwirionez. Ablamour d'eur c'havr ! Eur c'havrig vihan gwenn. Brava gavrig a c'helled gwelet, e gwirionez.

Eul loenig kaez evelse degas brezel ? ! Perak ne c'helje ket, va zud vat ? Sonjit 'ta peseurt darvoudou spontus a c'hoarvezas e Beddgelert gwechall ablamour d'eur c'hi. Eur c'hi hag eur bleiz, ya, gout ouzon.

Hag eñ e oa e Tan-y-Grisiau gavr ha bleiz ivez, a c'houlennit-hu, evel e kontadenn A. Daudet ? N'oa ket, va zud kaez ; an dra-mañ a zo c'hoarvezet ar bloaz-mañ, hag ar bleizi, zoken e Bro-Gembre, eo aet ar ouenn anezo da get abaoe pell 'zo.

Mont a reas Owen Lloyd eur sadornvez a viz Mae diweza da welout e vignon Bob Davies o jom e Ffestiniog. Eur c'havr a oa o peuri er prad drek an ti ha diou c'havrig nevez ganet o fringal vel daou lapous endro d'ez.

— « Kas unan anezo ganit, ma keres, Owen, ar vugale du-se a vo laouen ! » eme Bob goude merenn.

Hag Owen d'ar gêr da serr-noz, ar c'havrig wenn gantañ dindan e gazell. — « O, Mynnan bach, a zivize Owen ouz ar c'hrouadurig, o Mynnan bach, na pegen plijet e vo va mab Gareth ha va merc'h Glenys oc'h ober anaoudegez ganeoc'h-c'hwil bremaik. »

Hag e stagas Owen da gana a-bouez-penn a-hed traoñienn an Dwyrdd, o sonjal e plijadur e vugale.

Hag ec'h aozas Owen — a oa barz an tamm anezañ — eur « pennill » kaer kenañ a gane dre ma kerze ken ma tregerne sklint an kekleo ouz kribenn menez Manod war e zorn dehou.

« Brydferth yw, ei llygaid tyner »...

« Pegen koant ez eo-hi, gant he daoulagad tener »...

— Kaeroc'h « pennill » ne vo ket klevet en Eisteddvod meur, a sonje Manodiz ouz hen selaou ; kaeroc'h telenouriez ne vo ket eget hekleo moueztenor Owen Lloyd war gribennou glas menez Manod.

« Mè, è, è », a c'harme ar c'havrig etre daou ziskan, pe ablamour m'he doa kollet he mamm, pe ablamour m'he doa aon ouz an da-zont, ne ablamour ma stagas ar glao da goueza puilh ken ma voe ret da Owen Lloyd sevel kolier e chupenn ha goudori ar c'havrig war e vruchet dindan e vantell.

Hag a levenez e ti-glas Tan-y-Grisiau pa zegouezas an tad er gêr !

Diwezat evel ma oa, hag ar vugale nevez aet d'o gwele, e tilamjont o daou er gegin.

P'o doe briatet al loenig o gwalc'h, e voe ret mat d'ezo pep hini d'e dro rei da zena d'ar Mynnan gant ar biberenn-gwer bet miret en armel gant Gwen Lloyd o mamm abaoe ma oa Glenys eur babig anezi.

Deiz goude deiz e tirede ar vugale eus ar skol, heligenta etrezo da c'houzout piou a vagje Mynnan bach, ar c'havrig vihan.

Mynnan a voe anvet eveljust, hag e teuas bihan da gompren hec'h ano. Dont a rae war dreujou he c'hraouig da c'hedal ar vugale hag e lipe o daouarn d'ezo gant he zeodig ruz, evel eur c'hi.

Divizet e voe etre Gareth ha Glenys e vije pep hini e dro da c'horho Mynnan an deiz ma vije bras awalc'h da gaout laez. Rak kreski a rae ar c'havrig.

Eur c'havrig wenn n'hell ket beva e-pad he buhez diwar laez, setu ma voe ret da C'hareth ha da C'hlenys mont da gutuilh kaol ha deliou letus el liorz, drek an ti, evit terri he naon d'ez. Ha bemdez e kreske naon Mynnan bach.

« Gevred bihan, trubuilh bihan ; gevred bras, trubuilh bras » evel ma lavare Megan Griffiths an ti nesa gant skiant-prenet ha furnez Meirioniz.

Hag end eeun, eun deiz bennak wardro gouel sant Per, edo Mair Jones an ti-kreiz o tegouezout er gêr goude beza bet o « chopio » e stalioù ar Blaenau. Tavet e oa ar glao, laouen e oa Mair o soñjal er banne te a evje bramaik erruet en ti, hag e vousekane Mair :

« Mynd, trot, trot, ar y gaseg wen

« Mynd trot trot, i'r dref

« Mami 'n dod yn ôl.... »

— « Kaseg wenn, yn wir ! » eme Mair goude adkavout hec'h anal, « gavrig wenn dor-nesa kentoc'h... hag o voueta em liorz-me, o peuri va letuz tener... hag o... hag o kutuilh deliou va rozennoù kaera ! »

Rusoc'h eget he rozennoù he c'hlipenn gant ar gounnar, e lezas Mair Jones he faner war al leur hag e oa o redek da zigeri kloued al liorz pa zeuas eur soñj all en he fenn hag e tilammas betek toull-dor Gwen Lloyd :

— « Missis Lloyd, Missis Lloyd », a hopas, « brysiwch yma ; hastit dont da welout, hastit ! »

— « Pobol bach ! eme Gwen Lloyd hag hi o kregi garo er c'havrig hag o tibrada anezi d'ar gêr ; « pobol bach, da laret eo : sant Dewi d'am zikour ! » Ha c'hoaz ne rannas grik da Vair Jones diwarbenn ar c'hlemmoù he doa bet ar sizun araok digant daou amezeg all.

Adalek neuze, kaer o doa staga Mynnan gant eur gorden nevez, kaer o doa prena dor ar c'hraouig, e kave al loenig koulz ha bemdeiz tu da dec'hout kuit mod pe vod ha d'ober reuz e liorzou an amezeien. Deiz e liorz an Evansed, deiz e liorz ar Robertsed ; gwech e liorz daou pe dri amezeg war eun dro, gwech — ha diwar neuze ne voe peoc'h ebet — e liorz Megan Griffiths goz hec'h-unan.

Derc'hel a rae an amezeien da zont da glemm hag e krogjont da vazata ar c'havrig paour pa veze tapet o laerez.

Deiz goude deiz e yeas an traoù war wasaat ha tennoc'h tenna bemdeiz an darempredoù gant an amezeien. Dont a reas Huw Evans en ti da hopal taer ha garo :

— « Ret d'eoc'h ober eun dra bennak pe me, Huw map Hywel, me va-unan a grogo el loen-se hag hen kaso eun noz bennak da beuri war lein ar Wyddfa gant he c'hoarezed gouez. Hag e rin ! »

Hag en dije graet.

— « Pe ar peoc'h pe ar c'havr », eme Owen da Wen, d'ar sadorn da noz goude paka ar vugale en gwele.

Edont azezet e-tal an tan, — an amzer n'oa ket re domm daoust ma oa deut miz Gouere — o daou o tebri soñjou c'hwero, hag o klask penaos diskoulma ar seurt kudenn griz.

— « Pe ar c'havr pe ar peoc'h ! »

— « Mâ, ê, ê », a leñve Mynnan eus he c'hraouig da heti « nos da » d'he mignoned Glenys ha Gareth.

Antronoz e oa ar sul.

O tont d'ar gêr eus an ofis-beure e chapel an Tabernacl, e klevas Owen eun den eus Trawsfynydd o c'houlenn digant eur vaouez eus ar barrez :

— « Ha c'houi a ouife dare d'eur c'havrig gwenn da werza ! »

— « Me ! eme Owen d'ezañ, me am eus unan da zioueret ! »

Hag e-pad ma oa Glenys ha Gareth goude lein er skol-sul, da laret eo er c'hatekiz, e voe karget Mynnan e kar an den eus Trawsfynydd ha war-raok ganti evit mat !

Owen a zeuas en ti, an tri bilhed a vil lur gantañ en e zorn. Tri mil lur ! Biskoaz kement all. Teir gwech muioc'h eget talvoudegez ar c'havr.

— « O, eme Gwen, o sec'ha he lagad gant korn he zavañjer, pegon trist e vo ar vugale, peseurt poan-spered o devo o daou ! » Kement ken ma guzas Owen ar bilhedou prim-ha-prim en diretenn evel ma vijent o tevi d'ezañ e zaouarn.

En em gaout a reas ar vugale er ger dindan eur c'haouad glao pounner. Met gwasoc'h eget ar c'haouad-se e voe daelou Gareth ha Glenys pa glevjont petra a oa c'hoarvezet. Ar gerioù paour ne c'hellfent rei da gompren.

Mont a rejont da gousket koulskoude goude beza leñvet puilh war o fluegou, ha goude beza goulennet digant Doue en o fater mirout o Mynnan bach eus pep drouk.

E-pad an noz penn-da-benn e talc'has ar glao a-bil.

D'al lun, d'ar meur, ha d'ar merc'her e voe glao a-hed an deiz koulz laret. D'ar yaou e krogas ar Stêr-Ddwyrdd da zic'hanna war bradenn Cae-r-frith. D'ar sadorn e yeas Gwenn gant he bugale er bus glas da Llandudno ; eun dervez e bord ar mor a rafe plijadur d'ezo hep mar hag a c'hellfe marteze see'hi tamm pe damm an daelou a gendalc'hent da skuilh beure ha noz.

« Oumbarella-party » a vez graet gant Llandudnoiz eus gwragez Ffestiniog o tont a-garradoù da dremen an deiz, ablamour n'eo ken boazet tud Ffestiniog ouz an amzer fall ma vezont atao fur awalc'h da zegas bep a faraplui ganto memes da vord ar mor eun dervez hañv.

Oumbarella-party, yn wir !

Kement a zour a ziskennas eus an oabl ma voe ret an deiz-se d'ar weladennourien tremen eurvezioù en eur « c'hafeteria » bennak hag ober pemp pe c'hwec'h gwech tro stal vras Woolworth betek ma teuje an eur da dapout ar bus da vont d'ar gêr.

Eun druez ! Hag hi tremenet hanter miz-Gouere ! Peseurt hañv, va zud kaez !, Peseurt hanv !

Hervez ar gazetenn « Y Cymro », morse abaoe tregont vloaz ne oa bet gwelet ken uhel an doureier dindan « Devil's Bridge », Pont an Diaoul !

Ya, evel ma vije bet drouk en diaoul e-unan ; arne ha glao, glao, luc'hed ha kurun ha glao.

Evit Gareth ha Glenys n'eo ket an dro o doa graet e Llandudno he doa o soderañ tamm ebet. Seulvui ma tremene an amzer seul wasoc'h e oa ar c'heuz hag ar rann-galon o doa an eil hag egile o soñjal en o gavrig kollet.

Hag Owen o zad n'en doa mui kalon da gana pennillion ; skriva a reas end-eeun eul lizer da bennrener an Eisteddfod meur da denna e ano diwar roll ar genstriverien a oa da gana « pennillion ».

Siouaz ! edo paotred an Eisteddfod ankeniet bras ablamour d'ar gwall amzer ; ne deuje ket a dud d'ar gouel meur.

O resev lizer Owen e voe drouk e pennrener an Eisteddfod : hag heñ ha lammal en e garr ha yao wardu burevioù ar gazetenn « Y Cymro ».

Rener ar gazetenn a zisklaerias d'ezañ ar vrud a oa e rann-vro Ffestiniog : ma oa ken dourc'h an amzer eo dre ma leñve an aeloz er baradoz ablamour ma leñve Gareth ha Glenys gant ar c'heuz d'o gavrig.

Hag int o daou kerkent da di Owen Lloyd hag o tivizout gantañ betek rei d'ezañ da gompren e oa ret d'ezañ adprena ar c'havr.

Hag int a zri neuze en henchou e karr ar pennrener wardu Trawsfynydd.

— « Siouaz, eme an den goude selaou, siouaz ! netra d'ober ; adgwerzet am eus ar c'havrig wenn ! »

— « Da biou, va den mat, da biou ? »

— « Gwasa tra, va zud vat, tu ebet d'he dasprena, gwerzet am eus anezi d'ar Rouanez hec'h-unan.

— « D'ar Rouanez ! ? »

— « Ya, d'ar Rouanez, ha gwasoc'h c'hoaz n'eo ket eviti hec'h-unan he deus he frenet... »

Hag heñ da ziskleria :

— « Gout ouzoc'h en deus pep rujumant e loen-arouez, hag ez eo ar Rouanez a ginnig al loen-arouez da bep hini eus rujumanchou he falez. Loen-arouez ar Welsh Guards, evel ma ouzoc'h, a zo eur c'havr wenn. Ac'hanta, marvet ar c'havr goz, e teuas an deiz all sarjant-major ar Welsh Guards e permission da Drawsfynydd hag urz gantañ da brena eur c'havrig wenn. Aet eo hi gantañ ha da rujumant ar Rouanez eo hi bremañ betek mervel. »

Hir o fri ganto, e tistroas ar pennrener, paotr ar gazetenn hag Owen d'ar gêr ; hag an dour o tiriilh kement ma oa diaes gwelout hiroc'h eget ugent metrad pelloc'h eget fri ar wetur.

Pa glevas Gwenn hag ar vugale ar pez a oa c'hoarvezet, e chomjont sabatuet, stouet o fenn, mantret. Goude eur pennadig, koulskoude, e klevjod mouez voan Glenys etre diou zifronkadenn :

— « Me, emezi, 'zo o vont da skriva d'ar Rouanez. »
Hag e reas.

Pa lennas ar Rouanez lizer Glenys Lloyd, eur Gembreadez vihan a eiz vloaz, e oa ganti en he barlenn he merc'h, ar brinsez vihan Anna.

— « Petra 'rin, Anna darling ? eme ar Rouanez. »

— « O, mamm, lavarit ya ! »

Goude skriva eul lizer da C'hlenys Lloyd, e krogas ar Rouanez en he zelefon aour hag e c'halvas Koronel ar Welsh Guards.

Hag en noz-se e tegouezas e Tan-Y-Grisiau eur « Jeep » bleniet gant eur sarjant-major eus ar Welsh Guards ; hag eus penn-adrefiv ar « Jeep » e teue bep eun amzer eur vlejadenn voan : « Mè, è, è, emoun o tont ! »

Hag an heol a bare ruz en abardaez war ar c'houmoul a-us da veneziou Eryri, a-us da Voel-Hebog ha da Venez-Manod, ha war bradenn Cac-r-frith.

« Seblant tomder, eme Vegan-goz, a oar ar c'heleier araok « Y Cumro » e-unan.

Diwar neuze, e gwirionez, e voe an amzer bravoc'h brasa ha tommoc'h tomma dre ma tremene ar sizun. Ha morse ne voe gwelet kement a dud en Eisteddvod broadel. Morse kennebeut ne voe ken aes d'ar varnerien ober an dibab etre ar genstriverien er c'hana-pennillion.

« Brydferth yw ei llygaid tyner... »

Rak gant an tenor Owen Lloyd eo e teuas ar maout.

A. Koulouarn.

Roazon, 21 a Wenngolo 1954.



Sonerien vihan Boulvriag (C.-du-N.).

PHOTO « COURRIER »

Kenstrivadez ar prezegerez

Prezegenn Mari-Loisa FILLY,
eus Gwisni, bet d'ez ar priz kenta
et Lokournan hag e Gwened.

Kenvroiz ker

Gant piou n'eo ket bet digouezet kana eur wech bennak ? Marteze avat, an ton ne vez ket atao egiz ma tle beza, an dra-ze ne ra forz. Koz ha youank a renk awechou dizelei o menozioù, diskarga levezet o c'halon, kemeret perz el laouenedigez a zo en dro dezo, hag gant eur ganaouenn eo e kavont an tu hag an dro d'hen diskrouez ha d'her merka.

Evel an dantelez hag ar periez d'ar dilha-jou, evel ar bleuniou d'ar parkeier eo ar c'han d'ar vuhez. Peb bro, peb korn-douar, peb pobl o deus o c'hanaouennou, peb amzer ive a gav an tu da gana soniou ha gwerziou a ziwan da vare pe vare evel eur boked bleuniou pa zigor da gaerât ar bed.

Kanet ez eus bet gwechall, kanet e vezo hirio, rak ar c'han a zigas d'e heul levezet ha joa. An den ive a renk bep an amzer en em harpa war eun dra bennak a zikour anezañ da zevel e spered dreist abadennoù an douar.

E gwerziou koz Breiz-Izel, ma sellomp mat outo, e verv kalon hag ene eur bobl. Gouest int da lakaat ac'hanomp da dridal. Kanaouennou a zo a ziwan hag a-vec'h diwanet a varv. Bez ez eus re all, gwerziou nevez ha gwerziou koz a bad hag a gendalo'ho d'hor frealzi keit ha ma tregerno ganto hor maeziou. Enno e kaver livet karantez, labouriou, poaniou an dud. Piou ne anavez ket : an durzunel, va mab Sylvestrig, ô Breiz-Izel ! o kaera Bro ! pe Matilin an Dali ?...

Lod anezo a zigas sonj eus darvoudou digouezet gwechall, lod all a gan eürusted, gened, karantez eur plac'h yaouank koant.

Gwechall e tiwane muioc'h a ganaouennou etouez an dud. Mod ar vuhez a roe tro d'hen ober, ha tud d'o c'hana ne vanke ket.

Ar beilhadegou a veze stankoc'h ha goude koan en eur ziframma kannab pe en eur griha lin, da heul al labour e veze kanet. Ar merc'hed o neza a gano, ar c'hemer boazet da vont eus eun ti d'egile a gane.

Red an amzer a dro hag ar vuhez a chench. Hirio gant ar mekanikou, gant an T.S.F. n'ouzoun ket ha ne vez ket dilezet ar c'han gant lod eus an dud. N'euz forz, kanet e vez atao ; ar c'kouer a gano evel just e kreiz e barkeler, hag ar vamm d'he bugale.

... Fenaos pa vez joa ha levezet, leun er galon, chom mut dirak ar bed, pa sav kant al laboused er gwez, pa sav kan ar grilhed eus an douar, pa deu eus an abardaez an trouz-mor d'hon luskellat, pa zigor bleuniou a bep seurt liou dindan heol an Aotrou Doue ?


Ar yaouankizou a renk kana da greski o levezet da ankounac'hât o zristidigez awechou. Mat eo, gant ma vo gant soniou kaer, ha n'eo ket gant traou divlaz, eun drouez o c'hlevout.

... Soniou koz Breiz-Izel a zo gouest da lakaat tan, buhez, lusk e kalon n'eus forz piou ! Bez ez eus da gountanti peb rummad, d'ar vamm a lusk he bugel bihan, d'ar paotr yaouank oc'h hufivreal d'he mui-a-karet, d'ar plac'h yaouank da drei eun dañs-tro e douster an abardaez endro d'eun tantad tan, evit tud an eureujou, d'ar meder, ar martolod, evit ar mesaer bihan ha me oar.

D'ar yaouankiz da gana, o c'harantez, o levezet ; d'ar yaouankiz da gana o labour, o bro. Dre o c'hanaouenn e tigasint er bed-mañ muioc'h a eürusted d'ar re a zo o c'halon brevet gant an disesper, e tigasint d'al labourer nerz kalon da vont da benn. N'onkounac'haomp ket ive hor c'hantikou savet lod anezo gant sent koz hor bro, evel hini ar baradoz a gane ker c'houek ar paour-keaz dall Sant Herve. O c'hana pe o c'hlevet a zigas en hor buhez eun tañva eus peoc'h, eus eürusted an neñvou.



PHOTO JOS LE DOARÉ



Bodennou bihan a goural beo o tiskouez beg o fri dreist ar mor da vare an izel-vor.

Va beaj e Madagaskar

Pell emañ Madagaskar, ousspenn 11.000 km. ac'han, ha koulskoude ne lakaer nemet 27 eur bennak da vont eus Pariz da D-Tananarivo dre garr-nij. Kalz tud a zo o vevad er c'holoniou a gav plijusoc'h ober ar veaj dre vor. Evidoun-me e kav d'in eo kenteliusoc'h ar veaj dre aer. Diwar al listri ne welit ket ar broiou, nemet er porziou-mor; diwar ar c'hirri-nij e welit eur bern traou marzus, e-pad an deiz da vihana. Teir linenn kirri-nij a zo evit Madagaskar, unan dre Djibouti, eun all dre Cairo (Le Caire) ha Nairobi, an teirvet dre Alger, Kano (Nigeria), Brazzaville ha Livingstone (Rhodesia). An eil hag an teirvet em eus kemeret, ar pezh a laka da welout ar C'hilimandjaro, anezañ eur menez ramzel en Afrika ar Reter, kurunennet bepred gant erc'h ha skourn daoust d'ezañ da veza dindan ar c'heheder (équateur); lammdourioù ar Stêr Zambezi nepell diouz Livingstone, bravoc'h c'hoaz eget re an Niagara; ha menezioù gouez ha du ar Hoggar e-kreiz ar Sahara, e-lec'h ma vevas an Tad de Foucauld.

Madagaskar, eviti da veza ken bras ha Bro-C'hall, ar Beljik hag an Holland asamblez, n'he deus nemet war-dro 4.500.000 den o vevad enni. Pa dizez hec'h aochou en eur zont eus Afrika, e treuzer tachennou divent ha didud a-raok Tananarivo; diaes eo gwelout keriadennoù enno, nemet o tostaat ouz Tananarivo e vije. An darn vrasa eus an enezenn vras-se a zo goloet gant geot hir, melen ha kalet, mat hepken da vaga eur chatal treut. Gwechall e oa sur-mat kalz muioc'h a goajou, nemet tud ar vro o deus devet anezo da gaout muioc'h a blas evit lakaat ar saout da beuri. Kenderc'hel a reont da zevi ha da zevi, dre ma teu geot glas ha tener war-lerc'h an tan, evit eur pennadig-amzer berr-tre; hogen, dre forz tana ar geot abaoe kantvejou, ne chom a-benn ar fin nemet ar pezh a zo ar c'haleta hag ar falla, en doare ma teu an enezenn da veza paourc'h-paoura. Lavaret e vez alies ez eo ar chatal ar binvidigezh vrasa eus

ar vro-se: ar c'hontrol eo, ha kalz gwelloc'h e vije gouneza hepken manioù, mil pe traou all heñvel. Gwelloc'h e vije bet, da vihana, rak evit bremañ n'heller ket mui gouneza an douar e kalz kornioù 'zo, ken paour m'eo deut an douar da veza, pa n'eo ket aet a-grenn e-barz ar stêrioù gant an dour-red a grign an torgennou hag ar menezioù da vare ar barradou-glaou.

E gwirionez, kaout a reer eun nebeut tachennou-douar hag a zo gwelloc'h. War an uhelennou tro-dro da D-Tananarivo, e vez gounezet riz en holl drao-niennou gant tud ar vro evit o bevañs. A-hed an aochou, Kompagnunezioù gall bras o deus plantet traou all evit beza kaset da Europa: korz-sukr (canne à sucre), kafe, pebr, vanilh, ylong-ylong (evit ober c'houez-vat), ar pezh a deu mat a-walc'h war an douareier nevez-digaset gant ar stêrioù en o genou ha n'int ket paourat c'hoaz, hag ivez war ar menezioù-tan a wechall, evel e Nosy-Be, enezenn vihan e-tal an hini vras.

An darn vrasa eus pobloù Madagaskar a zo kristen. Ar re genta a voe kristenekaet gant misionerien protestant, dre ma voe levezon ar Soazon ar c'hreñva e-pad al lodenn genta eus an 19^{vet} kantved; hirio, niver ar protestanted hag hini ar gatoliked a zo heñvel pe dost, ha kalz beleien ha pastored a zo genidik eus ar vro e-unan, daoust ma 'z eus bepred re all a ouenn europat. Disheñvel-tre eo pobloù an enez dre o gouenn, ha koulskoude e komzont ar memes yez eus eur penn eus an enez d'egile. Gwechall-goz e oa skrivet ar yez-se, ar malgacheg, e lizerennou arab, hogen, war-dro 1820, e voe skrivet e lizerennou latin gant ar visionerien saoz, ha diwar ar c'hemm bras-se eo e teu ar skritur evel m'eo chomet betek bremañ. E malgacheg e vez kemmet ar c'hensonennoù hervez ar pezh a deu en o c'hichen, evel e brezoneg. Arabat kredi e vije ar malgacheg en eur stad dister evel m'eo ar yezou afrikat en A.O.F. hag en A.E.F.: amañ, ar yez a vez kenteliet er skolioù, zoken re dindan ar gouarnamant; kelaouennoù malgacheg a vez moulet, hag ar skritelloù er ruiou ha war ar mogerioù a zo diou yeziek (gallek ha malgacheg) evel e Bro-Elzas. Souezet e vlot marteze o lenn kement-se, evel m'oun bet va-unan ouz e welout du-hont; ha gwir eo koulskoude.

Ouspenn ar gristenien ez eus mahomediz niverus a-walc'h, an darn vrasa anezo o tont eus inizi Komor (Comores), ma vez an holl dud eus ar religion-se; ar re all a zo genidik eus al lodenn vahomedat eus Bro-Indez, deut d'ar c'hêrioù evit ober kenwerz. Kenwerzourien all a zo deut eus Kreisteiz Bro-Sina (Chine) (ne gaver ket kalz tud eus ar vro oc'h ober kenwerz).

Hogen, ne oan ket bet kaset da Vadagaskar evit deski doa reou an dud pe re ar c'hounidegezh-douar, nemet evit gouzout penaos eo stummet aochou lodenn walarn an enez, etre Diego-Suarez ha Majunga; hag eno em eus studiet dreist-holl ar c'houral (corail), pe gentoc'h an doare ma vez savet kerreg du-hont gant ar c'houral. Hemañ ne vev nemet er morioù tomm, e-lec'h ma kresk e bodennou-maen kaer-meurbet, a bep stumm hag a bep liou. Dañjerus-kenañ eo, ha da ziwall a zo da steki outañ gant ar bagou: ret eo ober ar c'hed, rak e sav a-bik eus ar mor doun ha ne weler ket anezañ a-bell pa vez kompez ar mor. Pa vez dichal bras, e c'hoarvez d'ezañ diskoueza beg e fri dreist ar mor, met evit eur pennadig-amzer hepken: e mod all e varvfe, ha setu perak ne gresk nemet betek live an izelvor.

Arabat kredi e vije koural beo hepken oc'h ober kerreg-koural Madagasker. Aze evel er morioù kouralek all er bed, al lodenn vrasa eus gorre ar c'herreg a zo koural maro, bet distaget gant ar mor rust diwar ar bodennou beo a gresk tro-dro, war bevnen ar c'herreg. Ouspenn ar c'houral ez eus ivez kregin a bep seurt, dianav e morioù Breiz, ma c'hellit gwelout a-wechou war siminal ar vartoloded koz. Alies en em zastum traer en eur c'horn sioul eus ar garreg, e-lec'h ma ne vez ket ker rust ar mor; an traer-se a deu diwar goural ha diwar gregin bruzunet, hag e vez savet gantañ inizi ront bihan a vez anvet

cayes de sable e galleg ha *sand cays* e saozneg. Kavout a reer en o zouez inizi yaouank, ma teu c'hoaz ar mor warno d'ar gourlano, hag inizi kosoc'h, uheloc'h, goloet gant gwez bihan hag a-wechou leun a laboused. N'eus ket koural beo, koulz lavaret, e genou ar stêrioù bras o tont eus diabarz ar vro; re a lec'hid a zo aze e-barz an dour; hogen, pellec'hik e weler seurtou koural hag a zo gouest da bellaat al lec'hid diwarno, o veva e bodennou bihan; pelloc'h c'hoaz en em zispak koural brao e lodennou bras ha leun a vuhez. Eun dra iskis eo koulskoude n'eus ket peurliesha kalz koural beo war ar c'herreg hir-hir a zo oc'h en em astenn evel eur c'harz divent a-hed an aochou, 30 pe 40 km. dirazo. N'em eus ket komprenet perak ne gresk ket mat ar c'houral en dourioù sklaer-se.

Ha meur a dra c'hoaz a vije da zisplega e kerreg-koural Madagaskar, heñvel ouz re an Australia e meur a geñver. Ar Saozon o deus graet ekspedissionou bras evit studia aochou an Australia, ha deut int a-benn da lakaat da gompren eur bern traou e buhez hag e savadurioù ar c'houral. Marteze e vo kavet tu hag arc'hant da ober kement-all evit Madagaskar, hag a zo chomet war-lerc'h war ar poent-se... hag ivez war galz re all.

A. Guilcher.



Breman 'z eus 500 vloaz...

An dug Per II hag ar Plac'h eürus Franseza Amboez

Da viz Gouere 1450, an Aotrou Per, eilvet eus an ano, Dug dre c'hras Doue, hag e bried an Itron Franseza Amboez, a bigne war dron Breiz. Daou vloaz ha tregont oa Per, ha breur oa d'an Dug aet da anaon Fransez kenta. Seiz vloaz hepen e tlie padout da c'houarn ar vro.

Kenderc'hel a reas gant labour e dad an Dug Yann V, gant hini e vreur an Dug Fransez kenta: mirout ar rouantelezh er-maez eus ar Brezel-kant-vloaz, ha rei tro d'ar vro da binvidikaat.

An Dug a oa lent, didrouz, met pennek a-wechou. Ha ma c'houarnas ar vro gant skiant, eo, war a greder, dre aked e bried, hag a zo bet laketaet e renk an dud eürus. Houmañ a boanias da lakaat er c'hargou a iliz pe a C'hauarnamant ar re ouesta hag ar re onesta. Ne lezas ket kennebeut kuzulierien an Dug da deurel tailhou pounner war ar bobl, war zigarez m'oa houmañ pinvidikaet gant ar peoc'h. Dre eno e welomp e vije diskiant tamail d'hon Duked beza chomet diseblant ouz o fobl, beza gwasket anezi gant tailhou pe vrezelioù hap ezomm. Eur rebech kontrol a vije d'ober d'ezo marteze: beza bet re lent e-keñver o fobl, beza kuzet outi ar wirionez-mañ: eur bobl vihan a die dibab alies etre ar binvidigezh hag ar frankiz. Ar frankiz a zo eun dra da veza paeet, gant aro'hant ha labour ar bobl atao ha gant he gwad alies. Ar binvidigezh a ro tro d'eur bobl da veza laosk ha da zont d'ober nebeut a stad eus he frankiz evit derc'hel d'he finvidigezh.

Per II a venne mirout he frankiz d'e vro. O'hoari he doa, d'an ampoent, oc'h en em sili etre paioù hec'h amezogezed: Bro-Saoz ha Bro-C'hall. Ar re-mañ, kant vloaz a oa dija, ne vrezelekaent mui war douar Breiz. Met Breiz, evit chom en he sav, a ranke atao harpa an eil rouantelezh pe eben. Yann V, a-du gant ar Soazon er penn kenta, a droas gnt Bro-C'hall en amzer santez Janned Ark, hag a viras an doare-ober-se betek e varo. E vab Fransez kenta a gendalc'has d'en em glevout

gant Bro-C'hall, ha Per II ne zislavaras ket kennebeut e vreur war ar poent-se.

Kastiza 'reas evelato eun torfed graet en amzer Fransez kenta. Ar prins Jili a Vreiz, breur da Ber ha da Fransez, a oa bet toullbac'het en amzer Fransez e-unan, abalamour ma tiskoueze re ar garantez a zouge d'ar Saozon. Toullbac'ha a oa a-walc'h d'an dug Fransez. Met Jili en doa enebourien douet, dreistholi Arzur a Vontauban. Hemañ a gavas a-du gantañ Gouarnier kastell an Hardouinez, e-lec'h m'edo kraouiet Jili. Ar prins kaez a voe taget eno gant bourevien paeet evit se... Deut da veza Dug nebeut goude, Per II a lakas barn ar re gablus. Ar gouarnier a voe dibennet. Met Arzur a Vontauban a c'hellas en em sacha en eur vont d'ar gouent. Diwezatac'h ar roue Loeiz XI a anvo anezañ da Arc'heskob e Bourdell !!!

D'ar mare ma pigne Per II war an tron, ar Soazon a oa war-nes beza skarzetaet kuit eus Bro-C'hall. Kuzulierien ar roue a gemeras neuze hardisegezh. Gwelout a raent ar mare o tostaat ma c'hellfent lakaat o c'hraban war Vreiz, ar vro binvidik, hep kaout ezomm da soñjal ha gwir o doa d'hen ober. Rei a rajont da Ber II an tafia eus o soubenn. E kreisteiz ar vro, e tiskleriont en deus ar roue galloud war douarou eskob Naoned. En hanternoz, ofisourien ar roue a laer diou pe deir lec'had vat a zouar da staga ouz an Normandi.

Hep ehana e klasked trouz ouz ar Vretoned. Er bloaz 1455 Per II a voe ken hegaset, ma lakas ober eun enklask war ar gwirioù a roue en doa Dug Breiz, ha war frankizoù ar vro... An testou a ziskulias n'en doa ket Dug Breiz muioc'h a zever da senti ouz ar Roue eget m'en doa ar Roue da senti ouz Dug Breiz. Per II, war-lerc'h an enklask se, en em santas harpet gant e Bobl, hag a roas da c'houzout d'ar Roue n'asante ket e vije breset e wirioù a zug: « An Dug, emezañ, ne c'hellfe ket lezel ober kement-se, nag e Bobl her gouzañv. Gwell e ve gant an Dug kaout poan ha mervel en eur en em zifenn en tabud-se ».

Kement-mañ a skrive d'ar roue er bloaz 1455. Daou vloaz diwezatac'h e tiskenne er bez. Nebeut a amzer marteze evit lakaat e vro e stad d'en em zifenn. Amzer a-walc'h avat evit kompren kalz traou.

Kompren a c'helle e ro eur vro binvidik c'hoant d'ar broioù all da lammat warni. Seul binvidikoc'h ar vro, seul brestoc'h e rank beza d'en em zifenn.

Eun dra 'zo evelato ha n'oa ket anavezet a-walc'h marteze gant Per II. Kredi 'rae oa a-walc'h d'ezañ beza gouest da broui e wirioù. Met kuzulierien ar roue a grede e c'helle ar roue ober ar pezh a gare, gant ma vije evit mad e rouantelezh: kement-se a zo kement ha lavarout e c'heller ober an droug evit tizout eur vad bennek, ar pezh a zo krenn a-enep Lezenn Doue, evit ar rouaned koulz hag evit an holl. Ma c'helle ar roue terri Lezenn Doue evit kreski e rouantelezh, e c'hellfe ivez, eun devez a vije, bresa gwirioù Dug Breiz. En devez-se, ma ne vije ket ar Bobl a-bez a-dreñv kein an Dug, penaos e c'hellfe ar vro mirout he Frankiz? A-benn tregont vloaz hepen war-lerc'h maro Per II, e voe anavezet splann ar gwirionezioù-se war an dachenn-emgann.

Da c'hortoz ar gwall zarvoudou-se, amzer an Dug Per II a voe eun amzer a peoc'h, a binvidigezh, a c'houelioù, a furnez kristen, a santelezh war an tron. Ni n'omp mui gouest da c'houzout petra eo beza eürus war an douar: setu perak n'omp ket gouest da gompren pegen brao oa beva en amzer-se.

Konhoiarn.



K E I L E I R

Pevara devez-studi ar Bleun-Brug evit ar c'helchjou.

Goude deveziou Karnag ha Lokorn, araok an hañv, setu m'eo adkroget ar Bleun-Brug adarre, da gelenn ar yaouankizou eus ar c'helc'hioù keltiek.

D'an 19 eus miz Gwengolo ez eus bet eun deveziad e Mesker e gourenez Guerande, evit kelc'hioù Bro-Naoned. En niverenn-mañ e c'heller lenn eur pennad diwar-benn an devez-se, skrivet gant unan eus ar yaouankizou a oa eno.

D'an 10 eus miz Here hon eus bet eun deveziad all e Itron-Varia Pennorz e Pouldreuzig. Eno e oa tud yaouank eus Pouldreuzig, Douarnenez, Pont-n'Abad, Lokronan, Fouenant, Elliant, Kemper, Ploueskad, Poullaouen, Guerande, Mesker, St-Nazaire hag an Naoned.

Tostig da gant a re yaouang o doa respontet d'hor galv, hag a en em gavas wardro dek eur er chapel gaer a-wel d'ar mor, evit eun oferenn lavaret gant an Ao. Troal, kelenner e Landi.

Goude an aviel e reas hemañ eur brezegenn entanet diwar-benn an dever hon eus da zero'hel d'an herez breizek ha kristen digaset d'eomp gant hon Tadou. Eur vouez flour, eur brezoneg dispar, eur feiz divrall, a lakeas e gomzou da ziskenn doun er c'halanou.

Ar re yaouank, endro d'ezo tud eus ar vro, a ganas leiz o c'halon hor c'hantikou brezonek. Kantik I. V. Pennorz a blijas eston.

Warlerc'h an oferenn, e-skeud ar chapel, an holl en em vodas evit selaou Per Salaun, a gomzas d'eomp eus ar sportou breizek.

Goude beza laket c'hoarioù hon tud koz da veva dirak hon daoulagad en eun doare plijus e c'houlennas ha ne ve ket tu d'o renka diouz an amzer vremañ ha da rei d'ezo eur vuhez nevez.

Eur pred laouen kenañ a voe kemeret a-gevret. Ar c'hanaouennoù koz ha nevez a darzas neuze ken gwas hag an tonnoù a lamme gwenn o c'hein, dek kammed diou-zomp : « Kan ha diskan », renet gant Loeiz Roparz eus Poullaouen.

Warlerc'h ar c'han, e teuas ar c'horolioù ouz trouz ar mor hag ar biniaou. Tud ar vro en em gemmeskas gant ar gorollerien. Ne voe eno disparti ebet etre ar c'helc'hioù hag ar bobl.

Kent kuitaat, e voe servichet bep a verenn-vihan d'an holl, e skol al leanezed. Eno, Loeiz Roparz a roas alioù d'ar c'helc'hioù evit ma vo frouezus o beilhadegou e-pad ar goañv. Petra da ober ? Deski dañsou ar vro. Mont e-touez an dud da zañsal ganto, d'o lakaat da gana ha da gana ganto. Pep kelc'h a dle studia ar brezoneg. Deski lenn. Netra aesoc'h. Loeiz Roparz a lenn e Poullaouen hag el lec'h all, kontadennoù fentus an Tad Medard, ken saourus e vrezoneg pobl. An holl o devez plijadur.

Visant Seite a roas da anaout gouel Eured-Aour ar Bleun-Brug, e Landi hag e Maner Keryann Sant-Nouga d'ar sul genta a viz Eost 1955. Komz a reas ivez eus ar skol vrezoneg dre lizer ha kinnig a reas prezegeerien d'ar c'helc'hioù d'o c'helenn e-pad ar goañv.

Ar c'han e strakas eur wech c'hoaz hag ar « Vro-Goz » a glozas an abaden. Bennoz Doue da Gelc'h Pouldreuzig evit o digemer vat.

An devez-studi a zeu a vo graet e Landi.

Skol dre lizer.

Adkroget hon eus gant hor skol dre lizer. Enskrivet hon eus bet war roll hor skol dre lizer, e-doug ar bloaz tremenet : 171 skoliad : 46 eus ar Finister, 32 eus ar G.-d.-N., 19 eus ar Morbihan, 27 eus an L.-et-V., 6 eus al L.-Inf., 36 eus Bro-C'hall ha 5 eus an estrañjour. — Anezo ez eus 52 maouez ha 119 gwaz. War 126 hag o deus roet o oad ez eus 84 o kaout nebeutoc'h eget 30 vloaz. — 124 o deus roet d'eomp da c'houzout o micherioù : 12 mestr pe mestrez-skol, 26 studier pe studierez, 14 implijad, 9 vicherour, 9 labourer-douar, 8 soudard, 5 martolod, 6 kleareg, 5 kenwerzour, 5 apotiker, 4 beleg, 3 arzour, 2 vaouez-tiegezh, 3 asistantez sosial, 2 ensellour. Ar re all, unan eus pep seurt a zo : metrer, keginer, klañvdiourez, baraer, medisin, ijinour, kourtier, paotr ostaleri, pastezier, komis-noter, skoutez, kereour, mouler, mitez. — 47 all n'o deus ket roet da anaout o micher. — Ar c'herioù a re ar muiad skolidi eo : Roazon 13 — Brest 11 — Paris 7 — St-Brieg 6 — An Oriant 3 — An Naoned 3 — Gwened 3 — Bourdel 3 — Dinan 3. Evit heulia hor skol dre lizer n'eus nemet skriva da : V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin (Finistère). Goude

beza prenet « Le Breton par l'Image » ha « Yez hon Tadou », ne goust netra hor skol. — An deverioù a vez reizet gant : Visant Seite, Korantin Riou, an Aotronez Kalvez ha Troal, beleien, ha Yann Gormerais.

Mac'harit Gourllaouen, rue de la Corderie, Douarnenez, a gendalc'h ive gant he skol dre lizer. Ma ne ra ket Mac'harit kalz a drouz, e ra, abaoe pell 'zo kalz a vad ha gant eur galon aour.

Ac'hanta, Bretoned, mar fell d'eoc'h, n'eo ket tu eo a vank d'eoc'h da zeski ho yez. Grit evel ar plac'h-mañ a skriv d'eomp kement-mañ : « Faisant partie du G. C. de Pl. je vois la nécessité de savoir notre langue plus à fond. Pourriez-vous donc m'inscrire à vos cours... » (G. C.)

Pe evel ar paotr-mañ eus Thiais, 18 vloaz (ginidik eus Montroulez)... « Me destinant au commerce, je passe mon C.A.P. d'aide comptable à la fin de l'année, et désire consacrer mes quelques heures de liberté à apprendre le breton, notre chère langue, pour laquelle tant de mes compatriotes sont prêts à donner leur vie pour qu'elle ne meure pas... » (L.M.C.)

20 lizer all evelse a c'hellfen embann. Ne dremen ket eur sizun hep na resevfenn daou pe dri.

Kredi 'ran, ma rafe an holl gazetennou bruderez en-dro d'hor skol dre lizer, n'eo ket 170 skoliad eo a zeufe d'eomp en eur bloavez, met 1.000...

Skol hañv.

Eur skol-hañv a zo bet evit ar vrezonegerie e Kleden-ar-C'hap e fin miz Eost. V. Seite a zo bet eng oc'h ober eur gaozcadenn war al labour graet gantañ war ar brezoneg er skolioù kristen.

Eur skol-hañv all a zo bet dalc'het e Brasparz, e miz Gwengolo gant paotred ar « Falz ». Eur toullad mat a skolaerien lik ha tud all a zo bet er skol-se. Prezegennou kentelius bras a zo bet graet.

Gouelioù.

Eur bern gouelioù breizek a zo bet adarre e-doug an hañv. Roet o deus tro da zastum eur bern brao a arc'hant evit ar brezoneg. Gouelioù Kerne e Kemper a ya dalc'hmata war gresk, ha ne seblant tamm ebet an dud en em skuiza ganto.

Fondation Culturelle Bretonne (F.C.B.).

Savet eo bet ar gevredigezh-mañ evit skignañ hag harpa ar brezoneg er skol.

Ret eo lakaat etre daouarn ar vugale, ar vistri, al levrioù ret evit deski ha kelenn ar yez. Ret eo rekompansi ar vugale hag ar vistri a boagn gant hor yez. Ret eo sevel kenstrivadegou ha rei prizioù. Ret eo dreist pep tra sevel al levrioù-skol a vank d'eomp c'hoaz ; advoula ar re a zo diviet... Peadra neketa, da implija milionoù.

Krog eo an F.C.B. da ziskoulma ar gudenn. En em harpa a ra evit-se war ar c'helc'hioù keltiek, a zo enno eur bern re yaouank leun a dan. Warlene o doa kestet tost da 800.000 lur. Er bloaz-mañ tostig da 1.500 000 lur, en eur vont da astenn an dorn dre an henc'hou, ar ruioù, war ar plasennou, en ostalerioù... pe e-doug gouelioù an hañv. Er Bleun-Brugou ez eus bet kestet war-dro 100.000 lur. E gouelioù Kerne euspenn 100.000 lur.

Lodennet e vez an arc'hant etre oberou brezonek ar skol gristen hag ar skol-stad. Etre al levrioù kaset d'ar skolioù-kristen « Yez hon Tadou », « Le Breton par l'Image » ha « Me a zesk brezoneg » hag ar prizioù roet d'ar vugale e-kerz ar bloaz-skol 53-54 hon eus dispignet eus kef « Ar brezoneg er Skol Gristen » ha kef « Ar Skol dre lizer » 239.216 lur.

Bez 'hon doa bet digant Kuzul-Meur ar Finister evit ar Skol dre lizer : 100.000 lur, d'ar 7-53 (subvansion hag a oa votet abaoe 1949) ; digant an F. C. B. 175.000 lur ; digant K. K Baod war gont an F. C. B. 11.000 lur ; digant eur madoberour 1.000 lur. Ar pezh a rae en holl : 287.000 lur.

Da fin ar bloaz-skol 53-54 e chome eta e kef ar skol dre lizer 47.784 lur. Ha netra ebet e kef « ar brezoneg er skol ». Abaoe, ar c'hef-mañ en deus resevet : 100.000 lur digant an F. C. B. 78.500 lur lezet gant an F. C. B. d'ar c'hef diwar kestou graet er Bleun-Brug ar pezh a ra en holl : 178.500. Diwar goust ar c'hef-mañ hon eus dispignet, evit rei prizioù d'ar vugale en hor Bleun-Brugou bihan ha bras 1954 : 83.490 lur. Chom a ra eta er c'hef en deiz a hiri : 95.010 lur.

Ezommou ar brezoneg er skol.

Ezomm hon eus da voula raktal :

1^o) Eil levrenn « Yez hon Tadou » : 200 paj. : 700.000 lur..

2^o) Hor geriadur brezoneg-galleg ha galleg-brezoneg : 800.000 lur.

3^o) Kenta levrenn « Yez hon Tadou » da advoula : 650.000 lur.

Ha pa vo diazezet da vad ar skrivadur nevez emeur o labourat warnañ, e vo an holl levriou all da advoula.

Ar brezoneg er skol.

Lavarit e pep lec'h e c'hell ar brezoneg servichout da c'hounit ar B.E.P.C. e-giz danvez da zibab (matière à option). Bez e c'hell kemer plas ar Spagnoleg, an Alamanege, ar « sciences naturelles »... An holl vrezonegerien a ray d'o bugale goulenn ar brezoneg evit ar B.E.P.C.

Kalanna ho pugale.

Poent eo dija soñjal e kalanna ho pugale. An holl gerent a wir vrelzat a rolo d'ezo da heul traou all, eul levr brezonek livet kaer. Goulennit diganeomp (Bleun-Brug Châteaulin, Finistère) : « Le Breton par l'Image », « Istor Breiz Toutouig » (édition Caouissin), « Troiou Kamm Matiltin an Dall » (éd. Caouissin). Goulennit digant Librairie La Fayette, Landerneau : « Le Paradis Breton » : eul levr dudius war buhez hor Sent Koz. Digant Kapusined Rosko : St Fransez, mignon ar vugale.

Evidoc'h.

Goulennit digant Maodez Glanndour (Abbé Le Floc'h, aumônier Institution Saint-Pierre, Saint-Brieuc) : Aviel Sant Mazhe, Aviel Sant Yann. Diskuliadur Sant Yann.

Levriou nevez.

Ouspenn e veaj e Madagaskar embannet amañ, hon eus resevet digant André Guilcher, kelenner e Skol-Veur Nancy : « Toponymie de la Rade de Brest et de ses abords » (Paris, Impr. Nationale 1954). Embannet en doa arao : « Côte bretonne entre Audierne et Saint-Malo, L'archipel Ouessant-Molène, La côte bretonne entre Le Conquet et Argenton, La côte bretonne entre le Four et l'île Vierge ». Labouriou talvoudus. Meuleudi d'al labourer kalonek.

Digant an Ao. Chaloni Lestienne hon eus resevet : « Saint Malo ou Maclou » (Impr. Briqueteur, Haudourdin, Nord). Eul levrig a 50 p. moulet kaer, plijus da lenn.

Piou ne anavez ket mouladurioù Jos an Doare eus Kastellin. Den muloc'h egetañ na oar lakaat kaerderioù Breiz-Izel da splanna dre fotoioù. N'eus ket kaeroc'h levriou skeudennet e neblec'h eget ar re diweza moulet gantañ diwarbenn : Kastell-Paol, Montroulez, Brest, Plougastel-Daoulas, Kastellin, Pont-Aven... Hor c'halvarioù, hor c'houefou, hon dafsou, hag an diweza o tont er-maez : **Ar Wero'hez e Breiz.**

Goulennit ive digantañ : (Jos Le Doaré, Châteaulin, Finistère) kartennou bloavez mat e brezoneg.

Bleun-Brug bras 1955.

An Ao. hag an Itr. Gab ar Moal, rener-meur ar Bleun-Brug ha Visant Seife, sekretour, a zo bet o welet an Ao. Pinvic, Député-Maer Landivizio, hag an Ao. Chaloni Guivarc'h, person. Eun digemer dreist a zo bet graet d'ezo. Pep tra a vo laket war-sao, evit ma vo Eured-Aour ar Bleun-Brug e Landi hag e Keryann-Sant-Nouga, kaera Bleun-Brug bet savet betek-hen.

Ganedigez.

An Ao. hag an Itron Moullec eus Kerahez a gemenn d'eomp ganedigez o merc'hig Mikaela, d'ar 27 a viz Eost e Douarnenez. An Itron Moullec (Mari-Jo Gassot), arao he dimezi a oa skriverez gant sekretourva ar Bleun-Brug. — Gourc'hemennou d'ar gerent, yec'hed ha buhez hir da Vikaela.

Journée Bleun-Brug en Haute-Bretagne

Les vœux formulés par Monseigneur Le Baron dans le dernier numéro du Bleun-Brug se réalisent. Après les réunions d'étude de Carnac et de Locronan, organisées par le Bleun-Brug, vient d'avoir lieu celle de Mesquer.

Dès le matin, dans un cadre idéal, face au grand large, les jeunes se réunirent tous pour prier à la chapelle de Notre-Dame de Merquet. M. l'abbé Legrand, aumônier diocésain du Bleun-Brug pour le pays nantais, leur dicta à l'Evangile la vraie ligne de conduite qui puisse épanouir un idéal fait d'autre chose que d'un superficiel verni artistique.

Puis, dans une conférence très documentée, M. Auclair, président du Cercle Celtique de Guérande, évoqua le passé de la presqu'île guérandaise et en présenta la géographie physique, humaine et linguistique, pour conclure par des perspectives d'avenir, sinon très brillantes, du moins rassurantes.

Un déjeuner, coupé de chants et suivi de danses, précéda un Cercle d'étude ayant pour thème le discours de S. S. Pie XII sur la valeur culturelle du folklore, au cours duquel furent précisés les buts des Cercles, et les principes à poser, au départ, pour les groupes en formation.

Dire que les jeunes du Pays Nantais furent heureux de cette Session d'Etude ne suffirait pas à exprimer leurs sentiments. De telles réunions étaient lettre morte pour la plupart d'entre eux ; aussi furent-ils immédiatement conquis par l'ambiance jeune et l'esprit de franche camaraderie qui présida à toutes les activités d'une journée dont le caractère marquant était l'homogénéité absolue. Du reste tous ceux qui le pouvaient avaient déjà pris rendez-vous pour Pouldreuzic malgré les distances. Pour beaucoup ce fut la découverte d'un bel idéal. Nombreux sont les parents, d'ailleurs, qui, conscients de leurs devoirs, ont compris l'utilité de l'action entreprise par le Bleun Brug et se félicitent de voir leurs enfants s'engager dans cette voie.

Si nous pouvons aborder l'avenir avec confiance, il ne faut pas toutefois demeurer dans l'euphorie d'une rencontre sympathique, et une tâche énorme reste à réaliser tant sur le plan Cercle, en général, que sur le plan plus particulier de la Bretagne gallaise.

Pour tous les Cercles, les Journées d'Etudes doivent être multipliées : le problème d'une élite susceptible de fournir des cadres se pose d'une façon toujours aussi aiguë. Avec l'aide de Dieu, l'avenir sera ce que les jeunes l'auront fait, il est urgent qu'ils le comprennent et agissent en conséquence. Déjà ceux qui connaissent le Bleun-Brug le considèrent comme leur seul appui moral susceptible de leur donner une ligne de conduite valable.

La réunion de Mesquer prouve que la Bretagne de langue française, et plus particulièrement le Pays Nantais, est prête à accueillir toute initiative de formation entreprise par le Bleun-Brug auquel les jeunes de cette région ont fait un accueil enthousiaste. Plus qu'ailleurs, ils ont besoin d'être soutenus dans leurs aspirations en but aux sarcasmes de tous ceux qui se font un devoir de faire disparaître tous les restes de civilisation bretonne. Si en Basse-Bretagne des sessions comme celle de Carnac ou de Locronan sont indispensables, elles le sont encore plus en Haute-Bretagne où tout concourt à faire oublier à la jeunesse ce qu'étaient ses aïeux.


Cependant, pour conserver leur intérêt, ces sessions doivent elles-mêmes évoluer vers une forme toujours améliorée. Tout particulièrement le ton dogmatique des conférences est à rejeter pour faire place aux cercles d'études et encore ces derniers doivent-ils être vivants, c'est pourquoi il semble souhaitable de communiquer aux participants éventuels des programmes plus détaillés. D'autre part, le repas en commun sans aucune division de cercles est indispensable à l'homogénéité de l'ambiance qui donne toute sa valeur à la réunion. Il ne reste donc plus qu'à formuler un vœu qui sera : toujours mieux, et plus souvent.

Un jeune du Pays de Nantes.

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan. — Tirage : 1.800 exemplaires.

QUIMPER, IMP. CORNOUAILLAISE. — C.P.P.P. N° 21697





Lokmaria an Hent. — Kuzet e mesk ar glaster, pet ha pet chapel e Breiz a gant meulendi da Vari !
PHOTO JOS LE DOARÉ